



CHANSON AR BAOURENTEZ

Me a oa skwis o serviji, na ne fell ket din a nac'h,
A me o sonjal demezi a kemer mab un ozac'h. (*bis*).

Goude ma c'hon bet eureujet, a me greg em sieges,
Me so mil gwech mallevrussoc'h, vit gwech-all pa oant ma-
[tes. (*bis*)].

Un domestik aman o serviji, mar bez hirie skandalet,
Ma ne nevez un tam kouraj, en deiz varlerc'h vezo
[ket. (*bis*)].

Tapout raï krog en n'he zillad, ho faka en neur pakat.
Kenavo ar c'henta gwelet, va mest o trugarekat. (*bis*).

Deut ganin kamaradezet, deut ganin d'am zieges,
Ag e welfet ar baourenteze ar seurt ne peuc'h gwelet
[james. (*bis*)].

Me ne meus na poud na pillik, na trebe, na skul, na loa,
Na gwele da gousket enhan, a gement a dall netra. (*bis*).

Gwech all pa oant me plac'h yaouank, me a zouge rubano,
Breman e meus eur vass alek, eur bizac'h da vont en
[dro. (*bis*)].

Goude beza klasket bara a danvez neubeut krampwez,
Taolliou dorn a taolliou boutou, me da zouten alies. (*bis*).

— 7 —

Pa venn o kemer va repos, var ar c'holo pe ar plous.
E komanso Jakes pec'hi, a d'am zreti a lwen lous. (*bis*).

Tapout ra krog bars em bleo, va zreïnna er meas an ty,
Dindan an erc'h, ar skorn kallet, na peubeus merzerenti.
(*bis*).

Ar pez ra din mya anken a glac'har bras em c'halon,
Ar vugale a vez tretet, gant ho zad memeus feson. (*bis*).

Petra dalv din mignonezet, konta dec'hu va anken,
Me wel erru va landruillen, en he zorn eur geuneuden. (*bis*).

Me well erru va landruillen, en he zorn eur geuneuden,
O ! Doue kamaradezet, ar bed so trist evellen. (*bis*).

Daou denn ag a vez kontradet er maeri dirag testou,
So henvel deus a lapouset, krenet ho diweskelou. (*bis*).

Goude ma c'homp bet eureujet, en ilis dirag Doue.
Me so dalc'het en esklavaj, a Jakes n'he liberte. (*bis*).

B. S.

